

**RIMADELLOU  
EVIT  
AR VUGALE**

**YANN-BAOL AN NOALLEG**

**RIMADELLOU**

**EVIT**

**AR VUGALE**

**RIMADELLOU  
EVIT  
AR VUGALE**



**YANN-BAOL AN NOALLEG**

**LEVRAOUEG BREIZH**

## KAZHIG

Kazhig bihan  
Va c'hazhig koant  
Gra flourig din  
Ha te'z po gwin!



## AN AOTROU KAZH

Mourroù, mourroù, setu ar c'hazh!  
Skilfoù, skilfoù, an Aotrou kazh.  
Skilfoù e-barzh, skilfoù er-maez,  
An Aotrou kazh a c'houlenn laezh!

## TARGAZH

Targazh! Targazh! Aze emayout?  
Nann, nann, n'emaon ket, n'emaon ket.  
Targazh! Targazh! Aze emayout?  
Logodennig, diwall ouzhit!

## LOGODENNIG

Ul logodennig o vont d'he zoullig,  
Ur pikol kazh ruz o kerzhout a-ruz,  
Buan, logodennig, kae 'barzh da doullig!

Sellomp dre ar prenestr.  
Petra a welomp-ni ?  
Ul logodenn vihan  
O kousket en he zi.

## MALIGORNIG

Maligorn, maligornig,  
Kouskit c'hoazh ur pennadig,  
Er-maez eo tomm an amzer,  
Ha n'hoc'h eus netra d'ober!

Koumoulenn, koumoulennig,  
Deuit amañ, deuit goustadik,  
Lakait ar glav da gouezhañ,  
Poent eo labourat bremañ!


Maligorn, maligornig,  
Tennit er-maez ur c'hornig,  
Ha bremañ ho taou gornig,  
Kit a-raok gant ho tiig.

## AOTROU MALIGORN

Demat, Aotrou Maligorn,  
Diskouezit din ho taougorn,  
Kenavo 'benn disadorn  
Poazhet gant amann er forn!

## KI BIHAN

Demat Aotrou, 'c'h eus ket gwelet  
Ar c'hi bihan a'm eus kollet?  
Du eo, ur merk gwenn war e benn,  
Redek a ra evel un tenn,  
Met n'en devo ket e soubenn,  
Ma ne zistro ket 'benn merenn.



## KI MAT

Tie, tie, tie, deus amañ ki mat!  
Eomp da vale e-barzh ar c'hoad,  
Eomp da c'hoari, eomp da lammat,  
Ha da redek ar razhed-koad!



## AR AVEL

Deiz, deiz, deiz! Piv a sko war an deiz!  
Deiz, deiz, deiz! Piv a c'houma digor!  
An deiz eo a sko war an deiz,  
An deiz eo a c'houma digor.

Fog, fog, fog! Piv a loar an deiz!  
Fog, fog, fog! Piv a loar an deiz!

## NOZ HA DEIZ

Noz eo, an dud a zo kousket,  
Setu al loar hag ar stered.  
Yen eo, tan a zo en oaled,  
Rak gwelout a reomp ar maged.

Deiz eo, an dud a zo laouen,  
En oabl emañ an heol melen.  
Tomm eo, setu ur vleunienn wenn  
O tiskouez he fenn er flourenn!




## AN AVEL

Dao, dao, dao! Piv a sko war an nor?  
Dao, dao, dao! Piv a c'houlenn digor?  
An avel eo a sko war an nor,  
An avel eo a c'houlenn digor.

Fou, fou, fou! a lavar an avel,  
Fou, fou, fou, me zo deuet a-bell  
O nijal uhel a-denn-askell,  
Ne glevit ket va mouezh o c'hervel?

O! digorit an nor d'an avel!  
Emañ o tont eus ar broioù pell...  
O! digorit an nor d'an avel,  
Ne glevit ket he mouezh o c'hervel?



## SETU AN HEOL


Setu an heol o trebuzer  
Fagan tudenno, koma ho da c'hoant  
Hastoma ho c'hoant  
Eomp

## AN DAOU AVAL

Aval ruz , avalig melen,  
C'hwi zo brav aze er wezenn,  
Aval ruz, avalig melen,  
Dindan lagad an heol laouen.

Aval ruz, avalig melen,  
Setu an avel o tremen,  
Aval ruz, avalig melen,  
Kouezhañ a rit war ar flourenn.


Aval ruz, avalig melen,  
Me'm eus ivez dentigoù gwenn,  
Aval ruz, avalig melen,  
Lezit me dantañ ho kroc'hen!



## SETU AN HEOL

Setu an heol o tiskouez e fri,  
Pegen tomm eo, eomp 'ta da c'hoari !  
Hastomp afo, er-maez eus an ti !  
Eomp bremañ er-maez da gorolliñ.

Setu an heol o kuzhat e fri,  
Pegen yen eo, echu ar c'hoari.  
Hastomp afo, buan e-barzh an ti!  
Ha bremañ eomp ouzh taol da zebriñ!



## GLAV

Glav, glav, glav a ra hiziv.  
Gleb, gleb, gleb eo va botoù!  
Va botoù ha va bragoù,  
O redek war ar straedoù !

## BLEUNIENNIG

Ar vleuniennig a zigor, a zigor  
a zigor  
Ar vleuniennig a zigor  
Dindan heol an hañv.

Emañ an dilennoù o serriñ, o serriñ  
emaint  
O serriñ, o serriñ, an heol a guzh.

## N'EO KET DIAES

N'eo ket diaes sevel un ti :  
Unan, daou, tri,  
Hag un doenn war e benn,  
Evit echuiñ...

## C'HOARI AN TREN

Hastit afo ! Hastit afo!  
Pignit e-barzh! Pignit e-barzh!  
Emañ an tren bras o vont kuit,  
Emañ an tren bras o vont kuit!  
Tch tch tch tch tch tch tch tch!  
Aiou 'ta, aiou 'ta! Deuit buan, deuit buan!  
Tch tch tch tch tch tch tch !  
Ha yao, war-raok! Ha yao war-raok!  
Bountañ-sachañ, bountañ-sachañ, (bis)  
Afo afo ato afo,  
Rodig a dro a ra bro, O! (bis)  
Goustad, goustad, goustad, goustad,  
Rodig a dro a ra bro, O! (bis)  
Bountañ-sachañ , bountañ-sachañ (bis)  
Emañ an tren o chom a-sav, (bis)  
Hag echu eo hon beaj vrav!

## LOSTIG AL LOUARN

Eomp 'ta da c'hoari war ar porzh,  
Eomp da c'hoari lostig al louarn.  
Unan, daou, tri, deuit buan da'm heul,  
Unan, daou, tri, kerzhomp lost-ha-lost!  
Kerzhomp goustad, kerzhomp goustad,  
Redomp herrek, redomp herrek,  
Unan, daou, tri, stlakomp hon daouarn,  
Kerzhomp war-raok, kerzhomp war-gil.  
Bremañ troomp war an tu all,  
Pevar, pemp, c'hwec'h, dañsomp e kelc'h,  
Eizh, seizh, nav, dek, redomp gorrek.

## VA MILIN

Ha va milin e drol  
Diga diga da  
Ha va milin e yal  
Diga diga da  
De valañ ar groun drol  
Diga diga dan  
Eit ober drol dige  
Diga diga da  
E milin e drol  
Diga diga da  
E milin e drol  
Diga diga da

## MAMMIG-YAR

Mammig-yar o skrabat,  
Poñsin o pigosat  
Hag ar c'hi o lammat.  
Buan! Buan! Eomp da guzhat!

## VA MILIN

Ha va milin a dro!  
Diga diga do,  
Ha va milin a ya!  
Diga diga da,  
Da valañ ar greun mat,  
Diga diga dad,  
Evit ober bleud flour,  
Diga diga dour,  
Ar miliner a gan,  
Diga diga dan,  
En ur labourat tenn!  
Diga diga denn!



**MOULET EL LISE  
LAENNEC-ROBIDOU  
GANT SKOLIDI P3  
82-83**

